

ARVOR

Koumanant-bloaz : 50 lur
SKRIVEREZH HA MEREREZH
G. BERTHOU, 72, Str. Oberthür,
Roazhon (K.R.P. 492-98, Roazhon)

KAZETENN SIZHUNIEK

N'ANKOUNAC'HAIT KET kas
C'HWEC'H REALAD timbroù pep
gwech ma fell deoc'h kemmañ
ho chomlec'h.

Skrivagnerien !

lennit hiziv war
"Arvor" reolennoù
Priz ar Romant !

TROET DIWAR AR GALLEG...

Piv a zo a-du ? Ha piv a-enep ?

A-du a-walc'h emañ gant pennad Alan al Louarn : « Troet diwar ar galleg ». Setu va respont berr-ha-berr.

1-añ — Ya ! mat eo ober troidigezhioù diwar ar galleg, met, a-raok, diwar ar yezhoù all, dreist-holl diwar ar yezhoù keltiek. Souplaat a rayo ar brezhoneg ganto.

2) — Talvout a ra treiñ e brezhoneg oberoù skrivet e galleg gant skrivagnerien hag a oar brezhoneg (met, da ziwelzhañ, rak n'on ket gwiall a-du !)

3) — Mat e vefe embann e brezhoneg skridoù 'zo, evel « La Légende de la Mort » (Anatol ar Bras), embannet war an « Annales de Bretagne », dres evel ma vezent notet gant Ar Bras, diwar muzelloù ar gonterien pe ar c'honterezed.

Hag ivez embannit kanaouennoù, re zispar evel « Me anavez ul lochenn » ha « Mintin war ar mor ! »

PRAUD DE LA MONNERIE.

(Kenderc'hel a raimp, ar sizhun a zeu, gant lizhiri hol lennerien diwar-benn an Troidigezhioù.)

Ur priz nevez evit ar Skrivagnerien Priz ar Romant

E-doug Kendalc'h Gwengamp, d'ar 25 a viz east 1943, e voe kemennet a-berzh « Skridoù Breizh » krouidigezh ur « Priz ar Romant » dindan baeroniezh ar Framm Keltiek.

Setu amañ reolennoù ar genstrivadeg :

1° Ur priz a zo kinniget gant an ti-embannerezh « Skridoù Breizh », anvet « Priz ar Romant ».

2° Roet e vo dindan baeroniezh Framm Keltiek Breizh.

3° Talvoudegezh ar priz eo 3.000 lur. Un eil priz a 1.000 lur a c'hello bezañ roet. Ma ne gaver e-touez an oberennoù kaset hini ebet dellezek eus ur priz, ne vo roet priz ebet.

4° An oberennoù kaset a die bezañ diembann. Bez' e tleont bezañ romantoù, pe oberennoù a lennegezh o tennañ d'ur romant (studiadenn istor « romantek » da skouer). Skrivet e tleont bezañ e brezhoneg, hervez an doare-skrivañ unvan.

5° An dornskridoù a die bezañ kaset, a-raok an deiz kentañ a viz Mezheven 1944, da sekretour Framm Keltiek Breizh, 19, straed ar Moneiz, Roazhon.

6° Barnet e vo an oberennoù gant ur strollad tri den : Roparz Hemon, Abeozen ha Youenn Drezon.

7° Embannet e vo anv ar gounezter pe ar c'hounezterion da zeiz Gouel ar Brezhoneg, d'ar 7 a viz Gouere 1944.

8° An oberenn pe an div oberenn loreet a vo embannet gant « Skridoù Breizh », a ray emglev gant ar skrivagner pe ar skriva-gnion.

9° An dornskridoù ne vint ket restaolet d'an oberennion.

GWALARN

Niv. 162 (C'hwevrer 1944)

TAOLENN

Emen emañ da vuhez ? barzhoneg gant Roparz Hemon. — Finvez Osian, barzhonegoù gant Abeozen. — Pennas e voe ijinet ar bagoù-dre-dan, abaden-skionz gant Jord ar Mee. — Katell gollet, gant F. R. A. — Ur skrivagner iwerzhonad : Lord Dunsany, gant Benead. — Hello ha ni, gant Roparz Ar Mason. — An amproviñ-poell hag an amproviñ-goueston, gant G. Ar Pagan. — Find e li Ramz an Draonienn, troet gant Kerlann. — Diazezoù ar sevel-guerzioù, gant F. Kervella. — Skridoù nevez.

Gwalarn, kelaouenn vizek. Koumanant bloaz : 100 lur. Koumanant a-enor : 200 ur. Kas an archant da : L. NEMO, 110, boulevard de Metz, Rennes. C. C. 12110 Rennes.

AR SARDINETA

hag an tabud peurbadus etre ar martolod

hag ar marc'hadour

gant A. BERDOUARE

En argoll e vez laketañ alies ijnerezh ar sardin, n'eo ket hepken abalamour ma vank alies ar pesked e dourioù Breizh, hogen ivez abalamour da gevezerezh, da « gonkurañ », an estrenvro, o vont atav war gresk, hag a ziframm digant hor c'henvroiz an tu da ozañ feurioù ar marc'had diouzh o gounid-bloaz nemetken.

A-raok ar brezel e oa deut da vezañ ret evit hon uzinerion paeañ ar pesked marc'had mat a-walc'h evit gallout stourm ouz ar c'hevezerezh estren; hag eus o gwellañ a raent evel just evit-se.

Ar besketaerion avat a oa evito kreskiñ priz ar sardin ur gwir didorras hag o doa graet dioutañ hep arvar betek-hen; ha bec'h o doa o plegañ d'un arboellerezh direizh ha digomprenus evito.

Setu aze menozioù kontrol, hag o doa, a-gevret gant luziadurioù a bep seurt, krouet ur gudenn ha n'helle ket bezañ diskoulmet en un taol kont, hag a ginnige mont war washaat bepred.

Ret eo da gentañ displegañ un nebeut gerioù implijet alies er breutadegoù, ha n'int ket gwiall sklaer atav, zoken e spered ar re a ra ganto. Anvioù an ardivinkoù-pesketa an hini eo, ar re a vez graet ganto war hon aodoù evit ar sardineta, ha n'eo ket akord atav ar besketaerion hag an uzinerion diwar o fenn.

ROUED EUN. A-holl-viskoazh eo bet sardinetaet war hon aodoù gant rouedoù eun, da lavarout eo rouedoù daou-ugent metrad hirder ha dek metrad led, gant spouennoù ouz ar vebenn uhelañ, staget ouz ar aoz ar vag gant ur pennad korden berr a-walc'h. Chom a ra ar vag a-benn ar c'has, ar mestr a daol er mor greun-moru sall a zedenn ar pesked hag a ra dezho « sevel » ha « labourat » en-dro d'ar roued.

Ar sardin a ya evel-se a-benn-herr ouz ar mailhoù tanav-tre, hogos diwelus, hag a chom pegel

Nevez voulet
KORF AN DEN
gant P. DENEZ
Priz : 21 lur
SKRIDOU BREIZH, BREST
35, STRAED TRAVERSE

BREZEL AR POST

Genver 1944

E miz genver e voe kaset d'ar Framm Keltiek 164 golo-lizher. Degasomp da soñj, en ur dramen, e voe 189 e miz kerzu ha 299 e miz du. Kroget fall ar bloavezh gant ar vrezhonegerion ! Ma kendalc'h e-giz-se, a-benn c'hwec'h miz e c'hellimp interiñ da vat Brezel ar Post, ha goap a raio ar C'hallaoued ouzimp, ha ma talc'h hor yezh da vezañ harluet ha dismegañset, n'hellimp ket lavarout n'omp ket kiriek. Sur-mat n'eo ket bet kaset d'imp kement golo-lizher bet skrivet e brezhoneg er miz-mañ; ur re bennek a zo manet sac'het du-mañ pe du-hont dre leziregezh ha digasted, evel boaz.

Ata, bec'h dezhi adarre ! Ra vo da nebeutañ 300 golo er miz a zeu.

Taolenn-enor :

Y. Tomaz-Ravalleg	35
F. Ar Rouz	15
O. Chevillotte	11
Kerlann	10

An ed en douar skanv Ar Segal

gant AR C'HOUER KOZH

Evel em eus displeget deoc'h endeo, troet omp bet tamm ha tamm, dre nerzh al ludu chimik, da c'houtin ed en douaroù skañv, na c'hellent dougen, en amzer gozh, nemet brug ha lann. Ha zoken ez omp aet re bell war an hent-se, betek paouraat hon douar, hep gouzout. Hiziv, avat, dre ziouer a ludu, e rankomp distreiñ d'ar c'hizioù kozh; diouzh un tu, n'eo ket un dra vat, rak ne c'hounezomp ket kement; met, diouzh un tu all, e reomp gwelloc'h evit hon douar; faziñ a rafe an dud o krediñ ez a an douar war baouraat bremañ; er c'hontrol, distreiñ

a ra d'ur stad welloc'h, dre ar gouennoù a vez implijet a-nevez, ne dennont ket re warnezhañ, hag a ro muioc'h a golo, ar pezh a roio muioc'h a deil.

O vale bro e-pad ar goañv-mañ, p'emañ an dud o hadañ gwinizh, setu petra am eus merzet : e meur a dachenn fonnus, e-lec'h ma veze hadet peurvuiañ gwinizh-dibab nevez, brizh-gouennoù, hag all, eo bet lakaet er bloaz-mañ gwinizh Gollendrap; en douaroù skañv, gwinizh bro, da lavarout eo gwinizh ruz bihan, gwinizh ouroun pe gwinizh Ralei; hag en douaroù skañv c'hoazh, gwinizh barvec goañv; en ur ger, gouennoù ed a veze dilezet muioc'h-mui hag a vezo adkavet gant plijadur gant ar vilinerion ha gant ar re a ra bara er ger. E miz meurzh a zeu e vo hadet ivez gwinizh barvec tri miz, pe gwinizh m' arz.

Hogen, n'eo ket a-walc'h. E parkoù 'zo, ne c'hellimp ket kaout, er bloaz a zeu, gant ar gouennoù gwinizh kozh zoken, un eost a dalvezo ar boan, ken dister eo al ludu hor bezo da lakaat. E-lec'h koll amzer hag arc'hant o hadañ gwinizh en ul lec'h ma ne zeuio ket da vad, gwelloc'h hadañ segal. Fonnusoc'h eo eget ar gwinizh; reiñ a ra daou vil lur pouez ha daou vil hanter en un douar ne rofe netra vat gant ar gwinizh. Evit ar c'holo, ez eo kalz fonnusoc'h c'hoazh eget ar gwinizh, ha gwelloc'h eo ar c'holo.

(Kendalc'h paj. 3.)

Amañ, Roazhon-Breizh

Plijadur e-leizh o devez ar re a glev abadennoù Roazhon-Breizh : kanaouennoù, bombard ha biniou, pezhioù-c'hoari, kaozeadennoù diwar-benn al labour-douar, ar mor, istor Breizh, hag all.

Hogen, daoust ha klevet e vez Roazhon-Breizh en ho korn-bro ?


Mar ne vez ket klevet, DRE HO FAZI EO.

Skrivit, skrivit da renenion Roazhon-Breizh, Ti ar Post, Roazhon, da lavarout e FELL DEOC'H KLEVOUT an abadennoù.

Skrivit ha lakait re all da skrivañ.

Pa vo degouezhet 50 lizher, 100 lizher, 1.000 lizher e Roazhon, NEUZE E VO GRAET UN DRA BENNAK.

(Kendalc'h p. 2)



Pesketaerion o tlestrañ kasedadoù sardined fresk en ur porzh-mor a Vreizh

vel, hervez ment ar sardin a gavo war an dachenn-besketa.

ROUED-TRO. Ur roued hir eo, a vez dispaket da gelc'hiañ an taolad pesked kerket ha kavet ar remañ. Graet ar c'helc'h, n'eus mui nemet riklañ lodenn izelañ ar roued d'ober ar c'hodell bras a vez tennet ar pesked diouli gant bizhier-roued.

Daou zoare roued : hini Gwezeneg hag hini Sant Wenole, a glot dre vras gant an displegadurioù a-us.

Tabutoù bras a zo bet diwar o

An Amzer o Tremen

◆ Pell diouzh didaerañ, mont a ra an emgannoù war washaat er Rusi. Gwech a-hont, gwech du-se, ren a ra ar Voleheviked o arsalhoù hep ehanañ morse. Kilet o deus an Alamaned etre al lenn Imen hag al lenn Peipous, ha dirak Nikopol. A-hend-all, e talc'hont penn.

◆ En Itali, ne da ket gwiall gaer an traoù gant ar Saozon hag an Amerikaned. Atav emaint dirak ar menez Cassino, daoust d'o strivoù. Uheloc'h, e penn pont Nettuno, o deus ranket kilañ e Aprilia. Kollet o deus un niver bras a brizonierien. Tennañ a ra noz-deiz kanolioù pounner an Alamaned war kerioù ha porzhioù Nettuno hag Anzio.

Bombez war Castelgandolfo domani ar Pab, war ar maez

N'en deus ar brezel na damant na doujañs da netra. N'eus ket pell eo aet kirri-nij ar Saozon-Amerikaned da deurel bombez war Castelgandolfo. Taget eo bet lod eus palezioù Hon Aotrou Santel ar Pab. Gwashoc'h : pemzek leanez (seurez) bennak a-voe lazhet en ur gouent, sko en e zomani, hag an deiz all, eo bet tro ouzhpenn hanter-kant beleg ha bloareg eus « Skolaj ar Pab », a voe flastret dindan an dismantrou.

Kemeromp digarez eus ar seurt darvoud kriz d'ober anaoudegezh gant Castelgandolfo.

Un eiz lev bennak diouzh Roma, emañ palez-hañv ar Pab, er gevred, a-zioc'h lenn Albano, war ribi hent

Marino, a gas, goude ober tro al lenn, d'an hent brudet anvet Straed Appius (Via Appia).

Palez Castelgandolfo, oberenn Carlo Maderna hag ar Bernin, a voe savet evit Urban VIII, a oa o chom eno, a-raok ma voe Pab.

N'eo ket bet dedennet heñvel gant ar c'horn-bro an holl Bibien a zeus war e lerc'h : gwechoù e veze brud bras gant Castelgandolfo, ha kerket goude, ankounac'h. Adalek 1870, ne zeus ken ar Bibien er-maez eus domani ar Vatikan, laeret ma oa bet o stadou gant Italiz. Dilezet e-pad tri-ugent bloaz, dalc'het e voe ar palez gant an drez hag al louzeier.

(Kendalc'h paj. 3)

AR FURCHER BREZHONEK

Diwar-benn an Ao. GUITTEREL

Setu amañ un tammig astenn da bennad Mari Riwalen Arvor, 5 C'hwevrer evit heñchañ an neb a c'hoantafe studiañ pishoc'h buhez hag oberoù Klaoda Guitterel. Pouezañ a ran war lizherennoù kentañ e anv hag e anv-badez, rak sinañ a reas meur a skrid "K. G." : Kan eur vamm da eal mad he bugel kousket (Feiz ha Breiz, 1866); Pardon Gwengamp (1869); ha dindan e anv : Gwerz Santez Germana Cousin (1875). Alies ivez e sine C. G.

War ar Conteur Breton (1864, niv. 3), war zigarez ma n'en doa roet Emil Souvestre nemet an droidigezh e'halek eus Kloareg Louador, e c'houlenne Kervarker ma vefe embannet hiviziken an oberoù brezhonek en o danevell o-unan. Ha da skouer e lake embann Gwestl eur C'hloarek, un oberoenn deut dezhañ a-berzh « Klaoda G., kloarek Pl. K. ».

Piv a zeufe a-benn da zibunañ kudennoù anv an aozer, hep gouzout pizh-pizh roll buhez ar skrivagner? Dre heñchañ eta am eus he dibunet en doare-mañ : An Ao. K. Guitterel, ganet e Sant-Nikolaz, d'an 20 a viz Du 1843; skoliet e Plougernevel hag e Kloardi Sant-Brieg; kelennet e Plougernevel a-raok bezañ beleget 21 Kerzu 1867; kure e Plonevez-Kintin (15 Gwengolo 1871), e Laniskad (18 Here 1873); person e Pañvrid-Kintin (10 Here 1881), e Sant-Vaeg (13 Gwengolo 1882); kelennet e Kloardi bras (20 Gouhere 1887); aluzennet Stez-Anna e Lanuon (19 Gwengolo 1890); anvet da chaloni-a-enor; person Gwareg (26 Mae 1898); roet e zilez evit mont da rejuñ e Krehen (25 Eost 1920). Mervel a reas d'an 14 a viz Genver 1925. Diwar ar roll-se eo bet aes lenn an diverrañ : Klaoda Guitterel, kloarek (n'eo ket beleget eta) Pl(ougernevel) K(ernev).

"Kantikou brezonek eskopti Sant-Brieg ha Landreger, reizet dre urz an Ao. n eskob F.-M. Fallières gant an Ao. chaloni Guitterel, person Gouarec", (1904), a zo bet advoulet e'wech gwech d'an nebeutañ (6^{vet} mouladur e 1924; aotreadur kentañ 19 Ebrel 1904). Ul levr 128 p. hep an tonioù, 254 p. gant an tonioù.

An Ao. Guitterel a aozas ivez Kantikou Zan-Vek (K. Sant-Vaeg), eil mouladur, Prud'homme, Sant-Brieg, 1890.

Brudet-kentañ e oa an Ao. Guitterel gant barzhed e amzer, diskibien Ar Gouideg ha mignoned Kervarker. Koul-skoude e skriva Prosper Proux kement-mañ d'an Uhel (20 Genver 1865) : "Je partage votre avis sur le Jean. Celui-là n'est pas un barde de centenaire, comme par exemple le Barde du Blavet qui lui a dédié dans le Journal de Quimper un chant si amphigourique et si filandreux" (TALDIR, Prosper Proux, p. 76). Yaouank e oa an Ao. Guitterel d'ar mare-se, avat.

Nebeut a dra a skrivas war Groaz ar Vretoned en tu all da 1905-1906; da vihanañ n'hon eus gwelet al lizherennoù K. G. pe C. G. nemet di-

baot. Evit gwir, diaes eo sevel levr-jennadur an oberoù brezhonek, ken troet eo bet, a-viskoazh, ar skriva-gnerien da guzhat o anv.

L. LOK.

AN ED EN DOUAR SKANV AR SEGAL (Kendalc'h ar baj. 1)

Mat eo da lakaat en douar skañv, war-lerc'h kement tra en deus dilouzaouet ha rouesaet an douar, o labourat munut a-walc'h, o hadañ gant an haderez hep mont don, ha dreist-holl, o hadañ abred, da lavarout eo e diwez miz gwengolo pe e miz here. Gwelloc'h eo e hadañ un tammig abred, rak ar glaveier da vare an hadañ a ra droug dezhañ. Bez' ez eus gouennou segal dibab, evel segal Brie, segal Pettkus, segal Svalöf. Gant segal-bro, avat, ez eus gwelloc'h kolo. Hag o tispertial mat ar greun, oc'h ober, koulz lavaret, an dibab dre vras, e c'helfed mont da vad gant ar segal-bro. E bro-Wened, e kaver segal mat.

Ret eo lakaat evezh ouzh ur c'hleñved a zeu a-wechoù war ar segal : ar pigel, anvet ivez an druilh; tev ha du e teu ar greun da vezañ war ur penn segal druilh. E Breizh ne gaver ket nemeur ar c'hleñved-se; ret eo lakaat evezh evelato, rak ur c'hontamm grevus a vez er segal druilh hag er bleud o tont dioutañ.

N'eo ket diaes eostañ segal rak stag mat eo ar greun ouzh ar pennoù; gant douar heñvel-heñvel, ez eus muioc'h a segal da gaut eget a winizh. En douar etre e c'hounezer a-wechoù, evel a ouzoc'h, ar segal mesk-ha-mesk gant ar gwinnizh, da lavarout eo segal-winizh. Gouzout a rit, erfin, e c'hounezer segal da reiñ, glaz, d'ar chatal : ar segal, hadet fonnus da gaut da falc'hat abred, a zo talvoudus en nevez-amzer; dont a ra gwelloc'h, fonnusoc'h, abretoc'h eget ar c'herc'h.

Setu petra am boa da lavarout deoc'h diwar-benn talvoudegezh ar segal, dreist-holl e-pad, an amzer a zienez a-vremañ. Lod o deus her c'homprenet dija. E douaroù skañv Bro-Wened ez eus bet atav kalz segal. E departamant Penn-ar-Bed ne chome ket kalz anezhañ : bre-mañ e teu en-dro. Evit reiñ ur skouer e c'hellañ lavarout deoc'h kement-mañ : o kentañ ur gooperativ hepken eus Departamant Penn-ar-Bed ne oa ganti kenwerzh ebet war ar segal, pemp bloaz 'zo : ober a ra bremañ daouzek kant mil lur ar bloaz, ar pezh a zo gwelloc'h eget koll gwinnizh en douar difonn.

Da ober bara ez a ar segal-se holl : ha gwell eo eget brenn er bara, pa 'z eus diouer a vleud. Ahend-all e c'heller lakaat ar segal da aozañ alkool, ha da voueta chatal, dreist-holl da voueta moc'h.

Soñjomp ouzhpenn ez eo paour an douar e Breizh : arabat tennañ re dioutañ. Talvoudek bras eo kaout ur seurt en ne sun ket pinvidigezh an douar, hag a ro kolo e-leizh, peadra da voueta chatal, da

LIZHEROU HOL LENNERIEN

Skrivañ a ra deomp hor c'hen-labourer mat, L. Lok :

"Bennoz Doue evit bezañ brudet va gwerzig diwar-benn bombezadeg Montroulez. Daoust da se eo chomet bouzar al lennerien. Gouel an deiz-ha-bloaz e Montroulez a zo bet dreist hag an aluzennoù fonnus. Diwezatoch e teui ar Vretoned vihan da belerinañ da Chapel-an-Aelez ha da bediñ Doue da bellaat diouzhimp gwalleurioù evel ar re a zo skoet warnomp."

Digant an Ao. Dujardin, medisin e Lokournan-Leon :

"O vezañ ma 'z on pesketaer e lennañ gant plijadur pennadoc'h Herle Blomarc'h. Brezhoneg ya'c'h a zo gantañ. Kredañ a ran koul-skoude eo ur fazi lavarout "d'ne an higenn". Paket e vez ar pesked d'ne o genou, a-wechoù dre o lost, met gant ur roud, gant un higenn."

"N'eo ket gwelloc'h brezhoneg ken-nebeut lavarout "EN-DRO da gredour Sant-Juan". Galleg eo. Aotour de a ve kentoc'h diwar-benn e droidigezh."

"Setu da ziskouez deoc'h e lennan pizh ARVOR."

ROAZHON-BREIZH

LUN 21 C'HWEVRER 1944

Breizh al Labour-Douar
19 e. — Plant-eoul an nevez-amzer, (G.), gant Esnault.
19 e. 08. — Ar c'herc'h, (B.), gant Ar C'houer Kozh.

MEURZH 22 C'HWEVRER

Evit Breizh-Uhel (G.)
18 e. 30. — Meurlarj e Breizh, gant Florian Le Roy. Displeget gant Yann Roazhon, Charlez Marvailh, Lena Hartey, ha Loeiza Beon, soprano; ouzh ar piano, Jef Penwenn.
19 e. — Deiziadur Jakez Morvan.
19 e. 04. — Kastell-Brien ha Bro-ar-Meeun, gant R. Pichery.

19 e. 09. — Evit ma vo renket rannyezhioù Breizh-Uhel, gant Fl. Le Roy.

MERC'HER 23 C'HWEVRER

Breizh ar Micherioù
19 e. — Ar gwiañderez e Dinan : ur weladenn da di an Itr. Laurent, (G.), gant Julieta Nizan.

YAOU 23 C'HWEVRER

Kardeur ar Framm Keltiek
19 e. — Diaez an dibab-micher, (G.), gant an Dim, Davaud.
19 e. 07. — An henchadurezh-picher, petra eo? (B.), gant Per Louedeg.

GWENER 25 C'HWEVRER

Ar Vuhez Keltiek
19 e. — Naontek kantved a zo, (B.), gant Jord Ar Mée.
19 e. 09. — Kanaouennoù a Vro-Skos, kanet gant Yann Dahoued ha Loeiza Beon; Andreu Vallee o vleniañ al laz-seniñ.

a) Perak gortoz? komzoù brezhonek gant Brython.
b) An huñveurioù kaer, komzoù brezhonek gant Roparz Hemon.

SADORN 26 C'HWEVRER

Evit Breizh-Izel (B.)
18 e. 30. — Bodadeg ar Sonerion : kan ha biniou gant an Dim, Loeiza hag Monaig Ar Foll, Fredig Noel, Dorrig Le Voyer ha Paul Monjarret.
19 e. — Kentel brezhonek Andreu Gelleg.
19 e. 10. — Dinan, kêr c'hlas, gant Kerverziou.

zastum bernioù teil ha da zisteurel d'an douar ar binvidigezh en deus ezhomm da gaout.

ALIOU AR MEDISIN AR ROGN pe DROUG SANT-MAEN

O tont en-dro d'ar ger, en deiz all, Perig a oa gantañ ur baperenn vihan, ur seurt lizherig glas, warnañ anv ha chomlec'h e gerent, an Ao. hag an Itr. Penlereg.

"Mamm", a c'harmas laouen, gwelet em eus hiziv medisin ar skol, hag en deus roet din an tammig paper-mañ evidoc'h."

"Petra 'zo?" eme an Itr. Penlereg, en ur grizañ he zal; "ne blij tamm ebet din paperioù ar medisin-se."

Hag hi da regin buan goloenn al lizher ha da lenn ar gerioù c'hwerv-mañ :

"Aotrou (pe Itron),
Ho mab, Per Penlereg, a zo bet paket ar rogn gantañ. Ret eo deoc'h gouenn diouzh digant ho medisintiegezh al louzoù dereat, rak ne vo degemeret ar bugel er skol ken na vo paret klok."

"An diaoul gant an den milliget-se!" a c'harmas an Itr. Penlereg. "Medisin dichek ha divergant! Paket gant ar rogn, va Perig bihan! ar paotr an naetañ hag ar gwellañ kempennet eus kêr a-bezh!"

D'an ampoent, e'c'h errue an Ao. Penlereg, o tont eus e vurev: un den a skiant hag a boell a zo anezhañ, ha ne vez ket trubuilhet gant farlennoù ar merc'hed:

"Rogn ar bara eo, a-dra-sur", emezañ dinec'h-bras. "Mont a ramp warc'hoazh da welout an doktor Kerbrad."

N'en deus ket kousket mat, en noz-vezh-se, ar paour kaezh Perig. Gant tomder e wele, e tebrone e groc'h e-kreiz-tre e vizied, war e zaouarn, a-ziagant d'e zigazel, war e gof ha war e zivvorzed, ha seulvui e krave, seulvui e tebrone gant e groc'h. Mall-bras e oa gantañ gwelout tarzh an deiz ha mont da di an doktor.

Medisin a vor e oa bet an Ao. Kerbrad, evel kalz eus e genvreder e Brest, ha gwelet en doa kement bosenn 'zo er broioù estren: droug-kousket en Afrika, terzhien domm en Azia, hag ar yuzevion en Amerika. N'eo ket eñ eta a vije bet spontet gant an amprevanig distu-se, graet « akarus » anezhañ gant ar ouizieion, hag a gas ar rogn da vab-den.

"Rogn ar bara?" emezañ, en ur c'hoatzhin a-strak hag a-strak ken e taskrenas ar gwerennoù. "N'eus rogn ar bara ebet, Ao. Penlereg ker! Rogn gwirion, rogn an « akarus », droug Sant-Maen, ne lavaran ket. Kemmer a reot, e ti an apotiker, al louzou-lart-se ha, warc'hoazh, gwiskañ a reot gantañ korf Perig en e bezh, nemet e benn, dreist-holl etre e vizied, war e zaouarn, e zaouilin hag e zigazel. Gellout a reot adober ar memes tra d'an deiz warlerc'h, hag a-benn tri deiz e vo gwalc'het Perig gant dour ha soavon (ma 'z eus c'hozh ganeoc'h), ha gwisket gant lien fresk. Ret e vo dreist-holl kanañ gant evezh kement lien bet gantañ : liñselioù, toagennoù, hag all."

Ha diwallit evidoc'h hag evit ke-

ment den 'zo er gêr : tremen a ra ur sizhunvezh eus ar c'hontammadur betek penn-kentañ ar c'hleñved. Mar deo tapet unan all ac'hanoc'h gant ar rogn, grit ar memes tra.

"Kenavo, Perig. Kenavo. Ao. Penlereg ker!"

AR SARDINETA

(Kendalc'h ar baj. 1)

Evel-se e teu an tabut war dachenn an arboellerezh, hogen anat eo stwazh n'eo nemet un darn dister eus ur gudenn kalz luzetoc'h a ranker sellout outi eeun ha gant'kalon.

Evit stourm ouzh ar c'hevezerezh estren evit marc'hadoù ar bed e vo ret da ijinerezh ar sardin kaout un danvez marc'h-had-mat.

Ha neuze, ret eo d'ar pesketaer tennañ diwar gwerzh e besked peadra da vevañ hag ur govr dereat evit e labour.

Diwar an hevelep abegoù eo ganet an daou dra-se, ha staget int an eil ouzh an hini all. An aon rak ar builhentez, an aon rak ar rouezder hag ouzhpenn ar boaz da deurel da pesked er mor evit mtrout ouzh an diwerzh pe rakuzullañ ar c'hementad da besketa evit derc'hel uhel ar prizioù, kement-se a zo mat da greskiñ c'hoazh ar c'hevezerezh estren diazezet dija en hor bro, tra ma vije a-walc'h gant unvanetezh an holl da drec'hif an holl zlaesterioù-se. Diwar-benn se n'eus nemet gwelout an alioù a roe an Ao. Moreux un nebeut bloavezhioù 'zo, da geñver ur c'hendalc'h bennak.

"N'ho-c'h eus nemet un tu da drec'hif war an dienez : gwerzhaf ho pesked e diabarzh ar vro.

E broioù estren 'zo e vez debret bep bloaz 17 kilogrammad pesked dre bennden e-lec'h 3 c'hilogrammad en hor bro-ni.

Ret eo enta prientiñ ar werzh hag ar werzh marc'h-had mat, en ur lezel ganeoc'h-hu pesketaerion an tu da werzhaf ho peskedadenn a-bezh kalz keroc'h eget bremañ.

Ma ne werzhit ket ho pesked diouzh tu, e rankit o zeurel er mor; ha kollet hoc'h amzer hag hoc'h arc'hant ganeoc'h. Petra da ober ? Dleet e vije d'ar Stad ho skoazellañ dre kemer ur perzh bras e savidigezh kambrou-skorn bras a rofe deoc'h an tu da vtrout fresk ho pesked.

Hag an Ao. Moreux ha klozañ e brezegenn en doare-mañ :

"Pleustret em eus a-zevri-kaer war gudenn mtrout ar pesked dre ar yentjenn. Debret em eus sardin bet mtrout a-ratozh e-pad tri miz kent dezho bezañ laketa er boestioù. Mat-tre e oant. Uzterion voued-mir a oa eno. Niverennet e oa bet ar boestioù aozet e-giz-se hag ar boestioù aozet en doare ordinal. Goude debrif eo bet votet da c'houzout pere ar boestioù gwellañ. Tonellet e oa bet an holl.

Evel-se e vo ar c'hambrou-skorn reizherion etre an oberiataerion hag an implijerion, o talvezout da reizhañ marc'h-had un danvez breizhek-rik."

Nevez voulet
GERIADUR BREZHONEK GALLEK ROPARZ HEMON

GOULENNIT !
Traoniennoù ha Kaniennou - mor
gant
Lan DEVENNEG
Priz : 50 lur
SKRIDOU BREIZH, BREST
35, STRAED TRAVERSE

NIV. 29
BOUDIG AN AOD
gant Paol FEVAL

Aozet e brezhoneg gant Per DENEZ

Dre an norig-se e teuas didrouz Simonaig e-barzh ar sal, leun he daoulagad a zaeroù hag o tifronkañ en un doare truezus.

"O ! Yannig kaezh !" a grias oc'h en em lezel da gouezhañ war ar plouz e-kichen ar c'ho-kesaer bihan, « perak out aet da redek war-lerc'h ar Voudig drouk-se ? »

Kregiñ a reas-hi en e zaouarn ha parañ sellou dizesper warnañ.

"Mervel ! mervel !" a vesteodas e-kreiz he daerou, « mervel ! nann, ne fell ket din e varvves, Yannig, va Yannig bihan, ne fell ket din ! »

Foll e oa-hi, heñvel !

Truez a savas e Yannig.

"Selaou", emezañ, « ret dit bezañ fur,

va merc'h. En hor micher, te 'oar ez eer alies d'an aod diouzh ar mintin ha ne zeuer ket en-dro d'an noz. Soñj 'ta ! m'az pije va c'hortozet en aner, Simonaig kaezh, ganit da vugaligoù emzivadet, neuze eo az pije bet gwir abeg da ouelañ ! »

A-dreuz an nor, e klevet ar soudarded o lavarout :

"Arsa ! gwall bell emañ hon Ao. Melear o tont. Ha ret e vo dimp 'ta gortoz, da vont da goaniañ, ma vo krouget ar c'hañfardig-se ? »

"Va zud vat", a responte mestr Gefez, laouen an tamm anezhañ henozh, « plijetoc'h e vefe mestr Melear o kavout al labour graet, setu va soñj ».

Digoret he doa Simonaig he divskouarn da selaou.

"Maint tont !" a hiboudas-hi. Stouiñ a reas Yannig e benn da dorchañ un daeraouenn e kuzh.

"Gouzout a ran ez out mat, Simonaig", emezañ, lent. « Ahont, e-kichen ar Pevar-Foull-Holen, ez eus ur vaouez paour kozh... »

"Da vamm, Yannig ? »

"Va mamm..., gwir eo... abretoc'h em bije dleet soñjal enni. Va mamm, ha hi hogos dall,

n'he deus mui nemedon da c'hounit bara dezhi. »

"He merc'h a vin !" a grias Simonaig.

"Prometiñ a rez ? »

"M'hen tou ! »

Sederaat a reas dremm Yannig.

"Neuze", emezañ, « ez i d'ar gêr arc'hoazh-vintin. Ne lavari ket krenn ha krak d'ar vaouez kozh : « Itron Renea, itron Renea, ur vicher gwall-zañjerus eo mont da redek war an traezhennoù-bouk. » Paouez a raio a nezañ, ha sellout ouzhit. Neuze e poki dezhi, Simonaig, ha kenderc'hel : « Itron Renea, o ! itron Renea !... »

Un huanadenn hir a dennas Yannig.

Simonaig a oa rannet he c'halon.

"Ya", a gendalc'has ar bugel kalonek-meurbet, « ya..., n'ouzon ket, me, Simonaig, penaos e ri, furoc'h egedon out, se 'zo sur. Pezh a zo ret eo kaout damant outi, kement e kar he faotrig, m'hen tou ! Ha... ha... o, va Doue ! me 'garfe e teufent buan d'am lazhañ. N'hellan mui padout ! »

Er-maez e varvailhe ar soudarded da dremen o amzer.

"Boudig an Aod", eme Gêrvoz, « ar c'han-nerzed-noz, ar c'horriganed hag ar peurrest,

KELEIER EUS AR VRO

BRO-DREGER

LANUON

GANEDIGEZH. — Ur Yann-Loeiz bihan a zo ganet e ti hor mignon mat an Ao. Yann Ar Bail, teñzorer Kelc'h Keltiek Lanuon. Hor gourc'hemmennoù gwirion d'an tad ha d'ar vamm ha buhez hir hag eürus d'ar Breizhadig nevez!

DIMEZIN. — An Aod Mikael Noi-reaux, ezel Kelc'h Keltiek Lanuon, ha diskiñ gredus ar skol vrezhonek, en deus kemeret da bried an 31 a viz Genver, an Dim. Ar Glas. Holl vignoned ar C'hele'h hag Arvor a gas dezho o-daou o gourc'hemmennoù kalonekañ a eurvad.

PREZEGENNOU TI-BREIZH. — Sekretour ar C'hele'h Keltiek, hor mignon mat Yann Ar Bail, breutaer e Lanuon, en deus graet ar merc'hed 2 a viz C'hwevrer, ur brezegenn vray-kenañ diwar-benn Nevenoc, kentañ roue Breizh. Un toulladig mat a dud a oa deut da selaou ar brezegenn-se, tud yaouank dreist-holl.

Bombes war Castelgandolfo

(Kendalc'h ar baj. 1)

E 1929, anzavet evel tra ar Gador Santel gant Emglev Latran, e save buhez nevez er palez. Kresket eo bet an domani gant daou zomani all, profet gant ar gouarnamant italiat; bez' ez eus dezhañ hiziviken dek devez-arat ha kant.

P'o deus adaozet ar palez, o deus an tisaverien graet o seizh gwellañ evit lakaat soñjal, en diavaez koulz hag en diabarzh, er Vatikan eun-hag-eeun: heñvel eo lec'hiet ar salioù, heñvel int kempenet, heñvel eo an arbeuri. Ezel er Vatikan atav, annezioù an Tad Santel a zo krenn-diseñvel o stumm dilorc'h ouzh pinvidigezh trellus an aour, ar marmor hag ar skeudennoù, a gaver, puilh-puilh er savadur.

Al liorz-h-veur, kresket gant hini ar villa Barberini, hag adkempennet hervez alioù Pius XI. n'eus. tro-war-dro, kaeroc'h alioù ha leurennoù eget he re. Ur vali hec'h-unan a zo dezhi tri-c'hard lev. Bleunvegou, stivelloù, statuoù, beolioù-mein a ya d'o fichañ. Aozet eo ar balioù e doare ma c'hell an Tad Santel bale ha kantren drezo, hep ma vo gwelet gant den ebet, daoust pegen tost emañ tiez ar gériadenn.

Kavout a raer ivez en domani: ur c'harrdi, ur skinva (evit ar radio), un dredanerezh-greiz (evit an elektrisite), un arvestva (evit studiañ ar stered), ur vereuri gant ar binvioù an nevesañ hag ar c'hlokañ, — 300 litrad laezh e vez gorotet bemdez! — tiez-bleunioù, kolonnennoù gwenn, ul lenn-besked, peadra, en ur ger berr, magañ an Tad Santel hag e dud, hep ma vo ret mont da c'houlenn tra da lec'h all.

Evit ar wech kentañ, en hañv warlene, n'eo ket act ar Pab da Castelgandolfo; chomet eo e Roma, da frealziñ an dud, pa vez bombe-zadegoù. Lakaet en deus, en e lec'h, en e halez, ar reuzeudien o deus ranket dilojañ diouzh Albano.

Bennozh Doue d'hor c'heneil evit e labour dudius!

PLEUMEUR-BODOU.

KANV. — Digwener diwezhañ e sone kleier Pleumeur, trist ha glacharet; an iliz, gwisket ganti he gwiskamant du ar c'haerañ evit resev korf « seur Loeiza », renerzh ar skol gristen. Deiz gouel ar Chandeleur-seur Loeiza a goueze marv mik en ar gribañ blev ar vugale kent mont d'an oferenn.

Pa gane ar beleg kantig an den kozh Simeon, *Nunc dimittis*, « Lezit bremañ, o va Doue, ho servicher da vont e peoc'h », seur Loeiza, hec'h holl nerzh aet e servij ar vugale, a roe hec'h ene da Zoue.

Ur bobl dud, merc'hed dreist-holl, a oa deredet da ambrog korf al leanez. An oferenn a voe kanet gant an Ao. Goualin, person, gantañ evel avielor an Aod. Masson, person an Enez-Veur hag evel abostoler an Ao. Roparz, kure e Pleumeur.

An Ao. Helary, person Perroz, a ganas al *Libera*; an tad Chevanche a heuilhas ar c'horf d'ar vered. An Ao. maer, L. Guillou, an Ao. Goffic, kentañ kuzulier, a oa deut da drugerkaat al leanez evit ar vad he deus graet e Pleumeur.

Kinnig a reomp d'he zud, da skol gristen ha da leanez Pleumeur hor gwellañ gourc'hemmennoù doaniet a gengañv.

An Dukard.

ST-JILI-AR-C'HOAD

EUREDOL. — D'ar 26 a viz genver e voe dimezet en o iliz-parrez Yann-Vari ar Merser ha Franseza Lavenan, Yann Soyer ha Jaaned-Marcharid ar Merser.

Goude bezañ displeget en ur brezegenn eus ar c'hwekañ deverioù an tiegezhioù kristen, an Ao. Chaloni Merser, rener Skolaj Sant-Jozeb Lanuon, eontr daou eus ar priedoù nevez, a ganas an oferenn-eured.

Goude an ofis, e voe bodet an holl gouvidi d'o fred e Kerbino. Ur gert graet evit ar brizonidi a voe dastumet enni tost da 1.300 lur.

Hon hetoù breizhek ha kalonek d'an dud nevez hag hor gwellañ gourc'hemmennoù d'o zud ha dreist-holl d'hor c'henlabourez vat, an dimezell Mari ar Merser, eus Trevereg.

BRO-GERNEV

KRAOZON

UR GENTEL. — P'edon o tont en ti an deiz all, e oa div vaouez o komz kreñv e traoñ an diri. Pa ne c'hellen ket tremen e-biou dezho, e oa ret din chom d'o selaou. Bez' e oa eno va amezeged hag ar vaouez eus Bourdel eruet er vro en derc'hent ha feurmte ur gambr ganti en ti. Uhel e komze maouez ar C'hreisteiz gant he fouez-mouezh gaskonat. Abaoe daou zevezh er vro, e oa tonket dezhi mervel gant an naon, rak ne gawe ket a vara da brenañ e nep lec'h. Bet e oa o trouzal en ti-kêr, « da di an archerien ez afe ivez », emezl. Ur vevzh e oa lezel anezhi hep bara. Deut d'he femp bloaz hag hanter-kant, n'he doa biskoazh dioueret bara ken na zeuas d'an tamm bro fañ-mañ.

« — Feiz », eme va amezeged, « warlene omp bet e-pad meur a sizhun hep kavout bara da brenañ. » « — E-pad meur a sizhun! Hag e chomit evel-se hep fiñval na tiral ger? » a hopas ar C'haskonadez; « du-mañ e vije aet an holl war al leurgêr da huchal. N'eus nemet ur bagad genaoueged ac'hanoc'h. »

« — Ho, maouez kaerzh », emezon, « ker boas omp-ni da zebriñ rusk avaloù-douar ma n'omp ket chalet hep bara. »

Koulskoude e vefe gwelloc'h dimp huchal ivez, ne gav ket deoc'h, lennerien?

E PRESBITAL SKRIGNAG

Da Roazhon e oamp aet gant mignoned. Leun ur c'harr-tan ac'hanomp. Noz-du e oa pa 'z ejomp kuit eus ar gêr-benn. Dre Skrignag e tremenjomp, rak unan ac'hanomp a chome er presbital. Eno e oa, anat d'an holl, « ti an Aotrou Doue ». Degouezhout a rejomp er vourc'h e-kreiz an noz. Dic'houlou e oa an holl diez; kousket Skrignagiz. Dibrenn e oa dor ar presbital, nemet an dud a oa aet da gousket. Er gegin e weljomp ur skritell vras, warni ar gerioù-mañ: « Donedigezh vat deoc'h! Diskuizhit, debrit, evit! »

Ha war an daol pourveziou, ur voutailh, gwerennou.

« Peger mat eo an Ao. Perrot », eme va breur.

« A ! ya », a respontjomp holl gwiltibunan a-greiz kalon.

Met klevet e oamp bet gant ar beleg karet, hag e tiskennas. Laouen e voemp ouzh e welout hag o komz outañ un tammig, a-raok mont adarre en noz...

Eñvorenn distet, ya, hogen eñvorenn c'hwek d'am c'halon enkrezet.

P. R.

BRO-LEON

GWIPAVAZ

N'EO KET DOUR BENNIGET A VOE SKUILHET! — Ur mintinvezh a viz Genver e rede ur c'helou trist ha farsus dre vourc'h Gwipavaz. En ar c'harrdi, tost d'ar vourc'h, a-gelez da hent Landerne, e oa bet al laeron. Ha petra o doa skrabet, ha skuilhet ivez, n'eo ket dour benniget, siwazh, c'hwia a zo o vont da welout.

An Ao. Divi r' Mao, glauouer, en doa graet ur c'harrdi evit lakaat e varc'hadourezh. Un nebeut devezhioù 'zo, e oa e-barzh un dek barrikenn bennak, lod karget a win, hag unan a odivi.

E-kreiz an noz e teuas al laeron er c'harrdi, dre ur p'nenestr, en ur derrañ ur werenn. En em gavet e-barzh, e tigorjont an nor-vras, ha diskargañ ar gwin war an douar, war-dro 6.000 litr! Ha goude bezañ skrivet un nebeut gerioù farsus war un daolenn-du, a oa eno, ez ejont kuit en ur gas ganto ar varrikennad kognak, enni war-dro 250 pe 300 litrad.

Diouzh ar mintin, pa 'n em gavas an amezelen war al lec'h, e oa poulladet ar gwin war an douar, nevez-labouret koulskoude, ezhomm ebet d'e « zourañ » eta! Hini ebet anezho n'o doa klevet na trouz na mouezh.

Ken nebeut a win hon eus ma 'z eo un d'ruzez gwelout kemend-all o redek war an douar, pa rank lod eus hor c'henvroiz chom hep banne gwin ebet d'o fredoù.

Y. Ar Ch.

LAERET AN TIKEDOU-BEVANS. — Er sizhun diwezhañ eus a viz Genver e voe laeret a Gwipavaz ul lodenn vras eus an tikedou-bevans. Diouzh

an abardaez war-dro 6 eur 30 ez eas Yann Vichel, implijad eus an ti-kêr, da gas an tikedou da di an archerien. En ur vont, an tikedou en ur garrigell sachet gantañ war e lere'h, e tremenas e-kichen ur marec'h-houarn dre-dan chomet a-sav, daou zen warnañ. En em gavet uheloc'h egeto, o kavout he doa e garrigell an aer da vezañ skañvoc'h, e taolas ur sell war e lere'h. Petra a velas? e garrigell c'houllo, ha paotred ar moto o lammat war o jav... hag en hent! Laeret o doa an tikedou, ha bremañ e redent, tizh warno, etrezek Brest, War-dro 3.000 follenn-dikedou bara, 3.000 follenn-gig ha 3.000 follenn druzoni a zo bet skrapet. Enklask a ra an archerien...

DILEZ. — Roet en deus an Ao. Yann-Vari (Ar Floc'h) e zilez a cil-vaer. Lakaet ez eus bet en e blas an Ao. 'n Oriant, en a-raok kuzulier an ti-kêr.

BODADEG AN EMGLEV-MICHER. — D'ar sadorn diwezhañ a viz Genver, d'an 29, e oa bodadeg e skol ar baotred gant Emglev-micher al Labour-Douar, e Gwipavaz.

War-dro 19 e. 30 e komañsas ar vadadeg. An Ao. Kerbouc'h, eus an U.R.C.A., hag an Ao. Uehard, sindik Landerne, a gomzas d'ar gouerien eus an emglevioù-micher, eus an de-ver o deus d'en em unaniñ, ma fell dezho gwelout o micher difennet goude ar brezel, hag ivez diwar-benn ar pezh a dlee ober ar goueriedad a oa bet laminet o zlegezhioù diganto dre ret ar brezel.

Re nebeut a dud a oa, siwazh, o selaou ar brezegerien, daoust ma ne oant deut koulskoude da gomz nemet evit mad hor micher.

Yann ar Chouan.

LANDEDA

EN-DRO DIAR C'HATEKIZ. — War ez eus bet lavaret din gant ur peun-tiegezh eus Landeda, ne vez ket graet ar c'hatekiz e brezhoneg er barrez-se. Ur vevzh en deus an ozhac'h-se hag hi o vont d'ar skol gristen. Katekiz gallek eo a vez graet dezhi: hag he breudeur e skol Laniliz a zesk katekiz brezhonek. Laouen e vije ar vevzhig-se da skoazellañ he breur bihan da zeskiñ e gatekiz; n'eo ket evit hen ober, avat, rak ne oar ket katekiz brezhonek. Ao. Person Landeda e vije na fellje ket dezhañ ober katekiz e yezh ar vro? Koulskoude e lavar er gador-brezeg ez eo ret mirout ar Brezhoneg.

BRO-WENED

BERTELAME

UN EURED BRAV. — War ar meurzh 18-vev a viz Genver ec'h eo bet lidet en iliz-parrez eured mab Ar Bras, a Gerneve, gant merc'h An Dorz, o chom er Resten. War-dro tri c'hant den a oa bet pedet d'ar c'hervad.

Rac'h an dud ag ar vourc'h, evel-just, a oa o sellout, gant o daoulagad dispoarbellet, ouzh an « amheuladeg » o vonet d'an iliz. Un ugentad a goubladoù e oant, gwisket e giz Baod. Kaerat arvest! ya, merc'hed ag ar c'hornad a gar o gwiskamantoù, met, siwazh! n'eus nemet ar bitaoded a zo pinvidik a-walc'h da brenañ unan. Gout a rit, tudou, pegenent e koust evit ur vaouez ur gwiskamant mod Baod? Pemzek mil lur! Da lavarout eo nen deo ket hiziv c'hoazh e c'hello maouez ar skolaer pe zimzell an ti-post prenañ unan.

BARA! BARA! — Abaoe miz 'zo n'eus ket bet bara e Bertelame. Nag un d'ruzez gwelout ar vicherourion o vonet da labourat en Oriant gant avaloù-douar hepken en o fodoù. Nag un d'ruzez klevout ar vugaligoù o c'houlenn digant o mamm (pa deo erru peder eur: « un tamm bara, mamm! »)

Setu perak, dimeurzh 25-vev a viz Genver, o deus 200 maouez pe war-dro en em dolpet dirak an ti-kêr o c'houlenn: « bara! bara! ». Aet int da glask an Ao. Evano, sekretour an ti-kêr hag e gaset betek an ti-post, hag aze e rankas pellgomz d'ar prefeti e Gwened.

Diouzh an tu 'rall ec'h eus bet graet bleud evit ar repudi gant is-prefed Pondivi. D'an 2 a viz C'hwevrer e tlee ar bleud erruout. Ur miz hanter hep bara, evelkent!...

ERFIN, ERRU EO HON TRO! — Un dizenor ruz e oa evidomp: soñjit ne oa ket bet laeret diganimp c'hoñjt an tikedou-houed! Dimec'h 26 a viz Genver, erfin, tri faotr, ur maskl war o dremm, o deus lakaet an traoù en urzh. An archerien o deus graet un dro-wenn war o lere'h.

BREIZH-UHEL

SANT-BRIEG

UN OFERENN EVIT AR VREZHONERGIEN. — Bez' o deus Bretoned Sant-Brieg an eurvad da c'hellout, bep miz, selaou un oferenn graet a-ratozh-kaer evito e chapel Sant-Wilherm. Trugarekaomp ar yaouankizoù o deus bet ar menoz dispar-se hag a ra berzh e-touez an holl koulz ar beorien hag ar blivdienn.

E-pad an oferenn e vez kanet kantikou brezhonek gant merc'hed yaouank Kelc'h Keltiek Pennteur hag un drugar eo klevout ar gristenien o tiskannañ war o lere'h evel ma vefent c'hoazh en o bro c'hendik.

Renet e vez pep abadenn gant an Ao. chaoni Broc'hon, viket-vras ha bep gwech e vez graet gant ur beleg ur brezegenn diwar-benn Breizh hag he feiz.

Goude an oferenn e vez gwerzhet gant an dud yaouank levrioù, kantikoù, keladennoù, dreist-holl *Arvor* hag *O Lo Lé*.

Hetomp ma teulo an oferenn-se da vezañ laeret bep pemzek deiz ha bep sizhun, zoken; neuze e c'hellor lavarout ez eus e Sant-Brieg ur barrez vrezhonek.

Lidet eo bet an oferenn diwezhañ d'an 13 a viz C'hwevrer, da 9 eur e chapel Sant-Gwilherm.

Sed a skriv da « Arvor » ur mestrol genidik eus Breizh-Izel. « Reputet eus a Vrest, emañ bremañ damdost da Sant-Brieg, ha un levezeg vrasañ eo din diskenn bep miz betek chapel Sant-Gwilherm da glevout oferen 9 eur, kanañ kantikou brezhonek, peññ e brezhoneg, ha dreist-holl klevout ha prizañ ur brezegenn c'hwek ha talvoudus war un dro. Meuleudi d'ar veleien galonek-se! Ar c'han ivez a ya mat en dro: paotred ha merc'hed ar C'hele'h Keltiek a zo da vezañ meulet ivez evit kaerder an ofisoù. O gopr o deus bet da Sul ar Rouaned, pa oa leun-kouch ar chapel. »

Gourc'hemmennoù kalonek da vrezhonegerien Sant-Brieg.

KASIT KELEIER HA KONTADENNOU DA « ARVOR »

ne dint netra nemet gevier d'an dud sot d'o c'hrediñ. »

« — Gevier! gevier! » a c'hrozmoles Meri, « p'en deus unan gwelet, evelkent! »

« — Ha petra ac'h eus gwelet, te? »

« — War ar skalier hag a zo en tu dehou da di va zad, e bro-Dreger », a respontas Meri, « em eus gwelet kornandoned o tiviz. Daou e oant, unan rouz hag unan brizh-du. An hini brizh-du a oa gwer e zaoulagad. »

« — Ha petra 'raent war ar skalier? »

« — N'em eus ket o c'homprenet, e latin e komzent. »

Dirollañ a reas an holl da c'hoarzhin ouzh ar respont-se.

« — Evit ar maouezed gwenn », eme ar Gonan ar gwareger, « dousennadoù anezho a anavezan em bro-me, en eskopti Gwened. Reoù lagenn C'hle-nag, e-kichen Karanter, a dap krog en dud d'o lakaat da dreiñ evel kornigelloù ha floup!... en dour. »

« — N'em eus-me gwelet morse kornandoned pe vaouezed gwenn », a gendalc'has ur soudard all, « met va eontr Renod a varvas gant ar spont o welout ur gannerez-noz. »

C'hoarzhin glas a rae bremañ an dud.

« — Hag ar gorriganed! » a grias Meri, « piv n'en deus ket o gwelet, en noz, o tañsal tro-dro d'ar c'hroazioù war al laneg? Ur wech edo va faeron Meri ar Poullgwenn o vazhata avaloù en e liorz. D'ar sul e oa hag amzer fall a rae. Da eur ar gousperoù e teuas un denjentil e-barzh! al liorz... dre belec'h? n'ouzon ket... hag eñ da lavarout d'am paeron: »

« — Gwell eo, neketa, va faotr, bazhata avaloù eget mont da vlejal ouzh al letrin? »

« — O! ya' da, » a respontas va faeron hep soñjal da fall.

Hag an denjentil, — ur c'horrigan e oa, — da gregiñ en ur walenn da vazhata an avaloù.

« — Un aotrou mat eo hemañ! » Sed a soñje va faeron.

A-boezelladoù e kouezhe an avaloù.

Pa voent kouzhet holl, ec'h stennas an denjentil e walenn davet va faeron, unan na oa ket gwidreüs-bras, o! nann.

Kregiñ a reas va faeron er walenn.

Ma, ker gwir ha m'emañ Poullgwenn e-kichen Plouvalae, en tu all d'ar Rañs, e voe dibradet va faeron a-us d'an avalenned. Krog e oa an den-

jentil e penn all walenn hag e neuze en aer evel ur pesk en dour.

Petra c'hoarvezas? Soñj a zouas d'am paeron dibunañ un *Ave*; dizale e tiskrogas ar c'horrigan diouzh ar walenn en ur grial: « — Va leskiñ a rez? » Na petra 'ta!

Dihuniñ a reas va faeron war vein Sant-Sulieg, ur gostezenn torret dezhañ... »

Tostaet o doa an holl da selaou ouzh an istor.

« — Met Boudig an Aod? » a c'houlennas Kêrvos, hanter-spontet dija.

Ur Matilin eo a respontas.

« — Bloavezhioù 'zo n'en doa den he gwelet », emezañ, « met, adal un deizioù bennak, e teu adarre dre amañ, rak ar skudelladoù yod a vez kemeret bemdez war drouzoù an tiez. »

Ur Matilin o vezañ komzet evel-se, e voe distagellet diouzhtu teodoù ar peder goton.

« — Gwir eo se! » a c'harmjont o-feder war un dro. « Hag an holl her goar: kement hini en em gav ganti, hag eñ e stad a bec'hed marvel, ne wel ket an heol o sevel antronoz vintin. »

(Da genderc'hel.)

HOR C'HONTADENN

AN DISTRO

Peder eur. Trouz houarnaj an treilh o serrin. Ar mevel, un eil-mestr e retred, a ra war e bouezig tro ar « hall ».

An draf marpr du a ya eus ur penn d'un all da vurev ar bank. E kreiz, ar c'hased-arc'hant gwerennet ha bevennet a gouevr.

Jilbert ar gasedourezh, a zifret gant ur bern jestroù aner. Hejañ a ra he c'horf a-bezh 'n ur follennañ ar bilhedoù.

« — Grit buan evit reiñ al lizheri d'ar sinadur. Aotre am eus bet gant ar rener da vont kuit abretoc'h.

Gant lammoù pig, goustad saisset, daoubleget war bep taol, Jilbert a gendalc'h : « — Grit buan ! »

« — Grit buan ! » Hag un taol pell-gomzer da sachañ evezh kamaladed ar c'hentañ solieradur : « — Grit buan ! »

Strakañ a ra ar skriverezed, ha seniñ ar pellgomzerioù. Ar sifrennoù a lamm taolet-distaolet :

« — Gwerzit ugent Huanchaca pevar ugent ! Prenit div lodenn Kanal Suez d'ar gwellañ !... »

« — Piv en deus paet ur chek evit Kervella 2343, dileour a bemzek mil lur ? »

Aïou ! Jilbert a zispac'h.

« — Gant ma vo a zoare pep tra ! Ha Jañ, ken lentik, he zad, a zeuio.

Ya ! gant e dog plat Uhelgoad, al las dindan ar gilpenn. Ma ! un den mat eo. O ! Va gwaleñ !... Laer a Gerbrat ! pa soñjan... Ken brav all, ha kant lur gwelloc'h marc'had e ti Jourdan !... Pemp, c'hwec'h, seizh kant mil... Seizh metrad tul, se a zo mal... Erwan a zeuio, ur goapaer, n'eus forzh !... Ya ! da biv ?... Perrin marteze, pemp c'hwec'h kant... desket eo... pevar, pemp... bachelour... gwellañ tonneler, e dad. Ur vicher vat. Arc'hant a zo, ha ken laouen !... Perrin netra, avat !... Kement a vugale... »

A hed ar strada, strolladoù doñvik. Un hanter dousenn a re yaouank er penn a-raok, o komz uhel gant gerioù goullou, oc'h ober neuz da gaout plijadur hag o c'hoapaal. War-lerc'h, goustatoc'h, ar re goshoc'h, nec'het war vale gant o c'horfoù bepred war azez ha war bleg ; o klask farsal ivez. Karout a rafent, aze, teurel evel ur gwiskamant labour skuizh, an taolioùgoù spilhoù pemdezic, ar gwarzioù, an taolioùgoù gwidre. Chom a ra ar seizh kozh. Goperezh adarre. Boued paour ha trenk, pa n'eus ken. Ha, goustad, e pignont.

An holl a c'hed dirak ar c'hafedi gant an diwezhadoù du-hont. Setu Perrin uhel he fenn, seder. Penn Perrin, eme unan, a vefe klok war stouf ur freskaer. Dres, seblantout a ra, zoken o vale er burev, tre-c'hiñ an avel gant he zal uhel strizh, he fri eun, he chik hir ha moan.

« — Petra c'hedit ? » « — Te, plac'hig ! »

Er sal, un tammig kemmesk ha safar. Nijerezh hag hejerezh Jilbert a gleiz ha a zehou. Pep hini abaf un tamm en em gav ouzh taol ; lie-naj gwenn, gver skedus, asiedoù « limoj » ha bleunioù fresk dirak an dud a enor.

Jilbert a c'hwec'h. Gant tommder ar gwin e sav ar mouezhoù hag e krog, — arabat koll amzer, — ar c'hanaouiñnoù.

Evel boaz, hep kemm, hemañ a zegas « Fourmaj an Aotrou Dupont », hennec'h « Bageerion ar Marr », hennoc'h « Ar c'hleierigoù ». Souezhenn ebet. Strakadennoù. Neuzioù laouen.

Ha setu : Jilbert a bed Perrin ha Perrin a sav. Perak Perrin ?... Ha Perrin a gan ; un dra bennak a zo en taol-mañ.

An hañb ha, war lerc'h, ar bloavezh penn da benn

A c'hell tremen Met. goul a ran erval, dont a ri din en dro evit alao, (1)

Petra ? zo ? Perrin ken balc'h ha yen bepred, gant ar mousc'hoarzh jintrus-se evit lodig hepen, Perrin a ginnig, hegarat kenañ, prof an holl, al loaiou ar-

c'hant, c'hoant Jilbert, ha Perrin a bok skañv ha kalonek d'ar plac'h.

Un dra bennak. Ha setu Erwan a sav. Dindan ar chupenn, ar « pull-over » souldard melen-gell. Eñ ivez a zo e « permission ».

Lod, kirius, a c'houlenn. « — Piv eo ? » Gwellañ araok an A. S. B. tonneler eus ar c'hentañ... ch... ch... a zoare... fentus... ch... sioul !..

An daoulagad du lemm a c'hoarzh a-dreñv al lunedoù tev. Ruz eo e gribenn liv d'un den o vevañ war ar frankiz ha divoaziet an an tiez, ur banne porto ouzhpenn-se.

Erwan a sell ouzh Perrin hag a gan.

Deomp, keneiled, an hent a zo kaer !... Hag adarre, skubet « Fourmaj an Aotrou Dupont » ha « Bageerion ar Marr », e c'hwec'h galloudus, didrec'hus, un dra bennak, fresk ha kreñv. Ar re strouetañ a vez un tammig.

Paotr Kozh an Uhelgoad reut, dic'hoarzh ha tavedek, a sell ouzh an tropell.

Ar rener, ur c'hreizeizad laouen ha ront a zispieg hetoù fonnus ha start. Madelezhioù ar bed a c'holo ar plac'h nevez. Strakadeg, gourc'hemennnoù. A ! Erfin echu an abadenn.

E-touez druilhaerezh ha d'ar red, e peg Jilbert e Perrin.

« — Deus ! Setu kamalad Jañ. Setu amañ Perrinaig ! » Sodenn.

Perrin abafet a lavar n'oaer petra, ha kuit. N'emañ ket Lambellez e toull an nor.

Ur miz e-kreiz ar vuhez ingal-pounner. Ar brezel hep brezelerezh, hag en un taol, ar veuzadeg. Erwan a zo, evel e gamaladed, paket e toull ifern Dukark ha prizonioc'h.

Ur stalag bennak, ar vuhez enoec'h hag ankenius da gentañ, ha seul vui, dre ma tremen an amzer. Ha soñj Perrin a zeu tost tostoc'h, gant kelec'h aour an dianavezerezh en dro dezhi, a nebeudoù e c'hounit ar plac'h.

Tamm ha tamm. An harlu, an dilabour ha piv 'oar petra ? Ur deziz eta e rankas skrivañ. Ur ger hepken, o c'houlenn ur respont dre vadelezh. Ur prizoniad ! Se ne vez nac'het.

E spered Perrin e oa tro da sikour ur paotr diaes e benn. E-spered Erwan edo an huñvre o kemerout buhez gwirion.

Hi a skrivas, evel ma soñje, evel ma veve, didro, eun, taer ha diblegus ha kuzh war un dro. He soñj war ar brezel, al labour, an tiegezh, he levrioù karet, ar vuhez.

Erwan a souezhe. Gwir eo n'oa ket ar vuhez ur c'hoari mell-droad burzhudus. Traoù all, ur bern. Evel un den a vel eus gorre ar Menez al lusenn o tec'hout diwar ar blaenenn hag o tizoleiñ ur vro divent :

« — Va mezevelañ a rit », a cilgerie.

Hogen se a oa Perrin a bezh. Houmañ a nec'he :

Lavaret hon eus er mizioù diwezhañ penaos e oa bet dieubet Breizh dindan Nevenoe, gant brezelioù, renerezh-stad ha dreit-holl astennidigezh gouenn ar Vrezhoned e Reter Bro-Wened. Goude marv ar roue e Bro-C'hall e tistroas da vat Erispoe da Vreizh gant e soudarded, ha, taget gant Charlez ar Moal, e vreas hemañ ur wech c'hoazh e Juvardel, e-kichen Angers, d'an 22 a viz cost 851. Tec'hout a reas ar Franked dirazañ, « evel boaz », evel ma lavar un danevellour frank e-unan. Roue Bro-C'hall a sinas neuz en Angers un emglev gant an trec'hour. Erispoe a oa anzavet gantañ da roue — chom a ra e waz koulskoude... war ar paper — ha broioù Roazon, Naoned ha Raer, aloubet gant Nevenoe hag ar c'hont frank Lamberzh, a voe staget end-ecun ouzh Breizh. Ne oa ket komz en emglev eus Lamberzh, a voe lazhet en 852, o lezel e spered e genvroiz eñvor un treitour. Talvoudus-kenañ, da nebeutañ, e oa bet e c'hoant-galloud evidompni. Goude-se e c'hellas Erispoe kemer gant lorc'h an anv a « Roue Breizh penn-da-benn » ha zoken « betek stêr ar Vezvenn ».

Ar c'hwec'h vloaz a dremenas etre emglev Angers ha marv Erispoe, a voe un ehan e-kreiz stourm ar Franked hag ar Vrezhoned. Dic'hoantet e oa da gentañ ar re-

« — N'eo ket eun, perak klask atav pemp troad d'ar maout. Pezh a zo anal d'in, a zo luziet evitañ. » Hag e spontas ar paotr. Tra ma greske ar garantez ennañ, — al luc'hskeudenn-se er godell a veze sellet outi ugent gwech bemdez, — e sante pegen pell edont an eil diouzh egile. Bez' e ouie ivez en doa kavet an nor vurzhudus war al liorz kuzh ankounac'hael.

Marteze gant an amzer... Nedeleg a zeas. Erwan a bedas e dud da gas eus e berzh ur walenn a bromaesa da Berrin. Evitañ, se 'oa ur seurt lianm gwall vresk, hogen ul lianmijig. Hi a sebezaz, hogen, nac'h ? N'he doa gwelet nemet ur c'hamalad. Nac'h ? ober poan d'unan doaniet. Ba ! Gwelet e vije diwezhatoc'h. Ha neuze, gwir abeg ebet, perak klask mont a eneb an dour.

« — Eurusañ den ! » « — Peur e c'helli loc'hañ ? » Bodet en dro d'e wele, emaint o tiverañ gant an dour.

« — Talvezet en devo da splujadenn er stêr skornet, evelato. Ma karfe bugale ar c'homandant mont da c'hoari lamm-en-dour bep an amzer ! »

« — N'eus nemedout o ragachañ alamaneg ! » « — Korc'het hon skouadrenn vell droad, da sutal ! »

Paotr Landeda a zihunas ; atav e veze moredet.

« — Ha va lizhiri ? penaos e rin ? » « — Hep ! selaoù ! mont a ri da Gërber hag e lavari d'ar re gozh... » Saik ar Floc'h a zeas tost, ha goustad.

« — Eürus on evident, kezuz am eus, avat. Bremañ e c'hellan lavarout, hepdout e vefen act er richer. Va nerzh am eus kavet ennout, hag ar c'hoant bevañ daoust da bep tra, hag al levenez bevañ bremañ. »

Erwan a selaou, e galon o tigeiriñ frank. Mont !... Ar vuhez ! Hag ar re-mañ ? Merzout a ra en un taol ar perzh kemeret ganto.

« — Nerzh am eus kavet ennout » ; hag eñ, bez' e oar, e nerzh a zo du-hont ; an hekleo o tasseññ amañ.

« — Nann ; pep hini evitañ e-unan, karout an dra dreist a zo e pep hini, daoust da bep tra. »

Ha spontañ a ra. « Perinaig, ket c'hoazh ! N'on ket prest, ket prest avalec'h. Ret din stourm c'hoazh ha bezañ an den nevez. »

« — Komandant, va digarezit ! Mar deo posupl, kasit Job ar c'here em lec'h. Koshoc'h eo, ha gwreg ha bugale dezhañ, hag emañ o koll e benn. Me a c'hell gedal un dro all. »

Hag e tistroas ar paotr en e gloerdi a garantez, tostaet, a grede, un taol muioc'h eget gant daou c'hant ger tener.

BARBA IVINEK.

(1) Troidigezh Kanenn Solveig, gant Kerlann.

Ul lur gig-kristen, mar plij !

AN DEBRIÑ-TUD ADARRE

Diaes e vefe lavarout e oa lipous-lipous pennadoù. Arzel Even war « an debriñ-tud » embannet war Arvor e veverennoù an nav hag ar c'hwec'h a viz genver. Leun a gentelioù e oant, avat.

A holl-viskoazh ez eus bet kavet tud hag a rae stad eus kig rostet o enebourien-pe o zadoù kozh, ha ne oa ket bepred, evel m'hen merk splann an Ao. Even, dre lipouserezh pe gasoni e raent.

Setu amañ un danevellig a zo bet degaset dimp gant tad an Istor, ar Gresiad Herodotez, a veve pemp kant vloaz a-raok Hor Salver hag en doa baled dre an holl vroioù anavezot d'ar mare :

« Ar roue Darius a c'halvas un dez davetañ tud a ouenn c'hresiat hag a oa dindan e velli, hag a c'houlennas diganto evit pegement ec'h asantfent debriñ korfoù marv o zadoù : respont a reas an holl gwiltbunan n'her rajent biken, ha pa ve kinniget dezho ur sachad arc'hant, Gervel a reas neuze ar roue tud a vro-Indez, Kalatiz o anv, hag a vez boas da zebrin o zud. Goulenn a reas ganto dirak ar C'hresianed, a veze troet dezho gant ur jubennour kement tra a oa laouet, evit pe briz e c'hellfent ober o menoz leskñ o zadoù goude o marv, evel ma rae ar C'hresianed. An Indeziz, droug enno, a c'harmas hag a bedas ar roue da chom hep rannañ kemzou ken kasas. »

Ha setu ar gentel a denn Herodotez :

« Hag a zalc'h he deus ar c'hiz war an dud !... Ma ! mar befe goulennet ouzh unan bennak pere a zo ar re wellañ, e-touez lezennoù ha gizioù an holl bobloù, n'eus mar ebet e respontfe, goude beza prederiet, eo re e vro c'hendik : rak n'eus den, nemet e ve diskiant pe gounnaret-mik, a rafe fae war c'hizioù e vro. »

Arabat dimp eta, tud seven ma 'z omp, en em c'houlenn ha gwel eo diskenn hon tud marv da gousket en douar, eget o debriñ, evit o lakaat da adveañ, enomp hag hon lakaat da badout drezo.

Arabat eo ! Hogen, araok barn re c'harv ar baour-kaezh tud ouez eus Okeania, e vefe mat dimp-ni, Kristentien, prederiañ, a-zevri war ar gomzoù kuñv ha kevrinus a zasson alles en hor c'halonoi : « Ur magadur eo va c'hig e gwirionez, hag un evaj eo va gwad... Mar ne zebrît ket korf Mab an Den ha ne evit ket e wad, ne vo ket a Vuhez ennoe'h... »

Barr ar garantez eo en em reññ, korf hag ene, d'e vignoned. Un Doue hepken, avat, a oa gouest da heurgas da benn en un doare derent huñvre karediget heb amzervezh.

Rak petra 'ta a c'hoarvez gant Kalatiz Herodotez, tud vresk, evel ma 'z omp ni holl ? Selaouomp c'hoazh, an istorour kozh, ha sklaer e vo ar gaoz :

« Pa gouez klañv unan anezho, mar deo ur gwaz, e vez lazhet diouzhtu gant e gerent tostañ hag e gneiled, war zigarez e kastize gant an derzhien ha ne vefe ken e gig ken saourus. Kaer en deus ar paotr kaezh dinac'hañ eo klañv, e vez troc'het e c'houzoug outañ didruez ha chervad a ra ar re all gant e gig. Mar deo ur wreg, kemend-all a vez graet dezhi gant ar maouezet an tostañ dezhi dre ar gwad. Lazhañ a reont ivez an dud deñt war an oad, hag o debriñ. Rouezkenañ eo avat ar re-mañ, evel ma c'heller krediñ. »

PER LAURENT.

Al labous a selle outañ ha ne lavare grik.

« Lavar demat da dintin ! » a rae Jakez en ur strilhañ ar gaoued.

« — Laosk al labous paour-se tran-kiñ, » a lavaras ar voereb, deut da welout petra a rae ur seurt choloni.

Hi act kuit, Jakez, pennnek, a grogas en-dro gant e gentel.

« — Lavar demat da dintin ! » Sivazh ! mut, mut e chome al labous.

« Lavar demat da dintin ! Lavar demat da dintin, pe me az krougo ! » a lavaras Jakez droug ennañ.

Hogen ne oa netra d'ober, ha setu Jakez nec'het bras gant e beroked mut.

Goude merenn tintin Mari a ziskennas ar beroked e kraou ar yer da c'hortoz m'he dije kompennet ur vach evitañ. Abardaez-noz, pa yeas da serriñ dor ar c'hraou, petra ! welas ! He deir yar, astennet war al leur, marv mik. Mantret, e yeas tre el log. En ur c'horn, war ar c'hilhog, ar beroked a grias soudent :

« — Lavar demat da dintin ! Lavar demat da dintin, pe me az krougo ! »

AR C'HEVROAD A SIN E LIZHERIOÙ HAG E BENNADOÙ « K. D. G. » A ZO PEDET DA REIÑ E ANV HAG E CHOMLEC'H DA VEROUR AR GAZETENN.

Ar Merour : GW. BERTHOU
Ti-Moulevrezh Kreiz Roazon
Aotre P. C. 520

vloaz a-raok Hor Salver hag en doa baled dre an holl vroioù anavezot d'ar mare :

« Ar roue Darius a c'halvas un dez davetañ tud a ouenn c'hresiat hag a oa dindan e velli, hag a c'houlennas diganto evit pegement ec'h asantfent debriñ korfoù marv o zadoù : respont a reas an holl gwiltbunan n'her rajent biken, ha pa ve kinniget dezho ur sachad arc'hant, Gervel a reas neuze ar roue tud a vro-Indez, Kalatiz o anv, hag a vez boas da zebrin o zud. Goulenn a reas ganto dirak ar C'hresianed, a veze troet dezho gant ur jubennour kement tra a oa laouet, evit pe briz e c'hellfent ober o menoz leskñ o zadoù goude o marv, evel ma rae ar C'hresianed. An Indeziz, droug enno, a c'harmas hag a bedas ar roue da chom hep rannañ kemzou ken kasas. »

Ha setu ar gentel a denn Herodotez :

« Hag a zalc'h he deus ar c'hiz war an dud !... Ma ! mar befe goulennet ouzh unan bennak pere a zo ar re wellañ, e-touez lezennoù ha gizioù an holl bobloù, n'eus mar ebet e respontfe, goude beza prederiet, eo re e vro c'hendik : rak n'eus den, nemet e ve diskiant pe gounnaret-mik, a rafe fae war c'hizioù e vro. »

Arabat dimp eta, tud seven ma 'z omp, en em c'houlenn ha gwel eo diskenn hon tud marv da gousket en douar, eget o debriñ, evit o lakaat da adveañ, enomp hag hon lakaat da badout drezo.

Arabat eo ! Hogen, araok barn re c'harv ar baour-kaezh tud ouez eus Okeania, e vefe mat dimp-ni, Kristentien, prederiañ, a-zevri war ar gomzoù kuñv ha kevrinus a zasson alles en hor c'halonoi : « Ur magadur eo va c'hig e gwirionez, hag un evaj eo va gwad... Mar ne zebrît ket korf Mab an Den ha ne evit ket e wad, ne vo ket a Vuhez ennoe'h... »

Barr ar garantez eo en em reññ, korf hag ene, d'e vignoned. Un Doue hepken, avat, a oa gouest da heurgas da benn en un doare derent huñvre karediget heb amzervezh.

Rak petra 'ta a c'hoarvez gant Kalatiz Herodotez, tud vresk, evel ma 'z omp ni holl ? Selaouomp c'hoazh, an istorour kozh, ha sklaer e vo ar gaoz :

« Pa gouez klañv unan anezho, mar deo ur gwaz, e vez lazhet diouzhtu gant e gerent tostañ hag e gneiled, war zigarez e kastize gant an derzhien ha ne vefe ken e gig ken saourus. Kaer en deus ar paotr kaezh dinac'hañ eo klañv, e vez troc'het e c'houzoug outañ didruez ha chervad a ra ar re all gant e gig. Mar deo ur wreg, kemend-all a vez graet dezhi gant ar maouezet an tostañ dezhi dre ar gwad. Lazhañ a reont ivez an dud deñt war an oad, hag o debriñ. Rouezkenañ eo avat ar re-mañ, evel ma c'heller krediñ. »

PER LAURENT.

Al labous a selle outañ ha ne lavare grik.

« Lavar demat da dintin ! » a rae Jakez en ur strilhañ ar gaoued.

« — Laosk al labous paour-se tran-kiñ, » a lavaras ar voereb, deut da welout petra a rae ur seurt choloni.

Hi act kuit, Jakez, pennnek, a grogas en-dro gant e gentel.

« — Lavar demat da dintin ! » Sivazh ! mut, mut e chome al labous.

« Lavar demat da dintin ! Lavar demat da dintin, pe me az krougo ! » a lavaras Jakez droug ennañ.

Hogen ne oa netra d'ober, ha setu Jakez nec'het bras gant e beroked mut.

Goude merenn tintin Mari a ziskennas ar beroked e kraou ar yer da c'hortoz m'he dije kompennet ur vach evitañ. Abardaez-noz, pa yeas da serriñ dor ar c'hraou, petra ! welas ! He deir yar, astennet war al leur, marv mik. Mantret, e yeas tre el log. En ur c'horn, war ar c'hilhog, ar beroked a grias soudent :

« — Lavar demat da dintin ! Lavar demat da dintin, pe me az krougo ! »

AR C'HEVROAD A SIN E LIZHERIOÙ HAG E BENNADOÙ « K. D. G. » A ZO PEDET DA REIÑ E ANV HAG E CHOMLEC'H DA VEROUR AR GAZETENN.

Ar Merour : GW. BERTHOU
Ti-Moulevrezh Kreiz Roazon
Aotre P. C. 520

Piv a lakaas ar c'horf marv e koufr ar c'harr-tan ? evit hen gouzout lennit... EN UR RAMBREAL romant nevez Y. - V. KERWERC'HEZ

ASTENNIDIGEZH VREIZH GOUDE NEVENOE gant Paol AR FLOC'H

mañ evit ur mare gant ar pezh o doa gounezet ; ha dreist-holl e teue liesoc'h bremañ paganed an Hanternoz — an Normaned — da zilestrañ war aodoù Breizh, o freuzhañ hag o tismantrañ aber al Loer hag ar broioù tro-war-dro. Losket eo Naoned meur a wech gant. Soudarded Erispoe a dle chom enta e Breizh evit difenn ar vro diouzh an enebourion griz-se. Politikerezh Erispoe e-unan a zo ivez a-bouez bras evit disklériañ an ehan-brezel : fellout a rae dezhañ mirout ar peoc'h gant Bro-C'hall, evit startaat emglev Angers. Evel-se e voe lakaet en-dro ar Frank Actardus, bet kaset kuit gant Nevenoe, war gador-eskob Naoned ; anzav a ra Erispoe, en ur skrid, « braster e bec'hedoù ha re e dad Nevenoe ». En abeg da se e voe barnet gwelloc'h gant ar Franked hon eil roue eget an hini kentañ ; edo zoken Charlez ar Moal e soñj eurediñ e vab Loeiz gant merc'h roue Breizh. Ne voe ket graet an

eured-se avat, rak lazhet e voe Erispoe, e miz du 857, gant e genderv Salaun.

Hennezh en doa graet e vuntr dre youl-sevel moarvat, hogen ivez dre ebeiezh ouzh ar Franked. Raktal e kasas Charlez ar Moal un arme da Vreizh, met ne stourmas ket ; er bloavezhioù da heul avat, Salaun an hini a gendalc'h gant brezelioù brôadel ar Vrezhoned, oc'h en em unañ gant holl enebourion ar Franked, kristen pe digristen, hag oc'h ober e vad eus dizurzhioù ar vro nesañ. A-gevret da gentañ gant aotrounez vras Bro-C'hall — en o zouez Roperzh ar C'hreñv, tad-kozh ar Gapesianed, — ha gant an Alamaned e reas ar brezel da Charlez ar Moal ; hemañ evit echuiñ en devoe un emwel gantañ e 863 e manati Entrammes, war ar Vezvenn. Ar vro betek Angers a voe rôet eno da Salaun, nemet e oa dalc'het dindan gwazonezh ar Frank. Ne badas ket pell an emglev avat ; hag evit gounit

muioc'h c'hoazh en em gevredas Salaun gant Skandinaviz, ha gwas-tañ a-gevret ganto Le Mans en 865.

Ar veleion evel just a savas o mouezh a-enep ar c'hevredadur-se ; an eskibion bodet e Soissons a gasas ul lizher d'ar Pab, o lavarout e oa ar Vrezhoned « Barbaled » kriz ha gouez, o doa freuzhet hagasket « Iliz Neustria », ha gwis-hoc'h c'hoazh, nac'het pacañ ar-c'hand d'o Ao. Charlez. Ar c'homzou-se ne virjont ket ouzh ar Vrezhoned, unanet gant ar baganed norman, a wastañ adarre Kornog Bro-C'hall ; ne c'hellas ket Roperzh ar C'hreñv e-unan derec'hel penn outo, ha lazhet e voe en emgann Brissarthe. Ret e voe da Charlez ar Moal, spontet gant trec'h e enebourion, ober ar peoc'h gant Salaun. D'ar c'hentañ a viz cost 867, e Compiègne, e voe roet evit e vestr da Baseweten, kannad Breizh, kontelezhioù Avranches ha Coutances ; ha dieub-kaer e oa bremañ ar Vrezhoned e-keñver ar Franked war dachenn an trunj. Gallout a reas bremañ ar roue lakant skrivañ wr an dielloù ; « Salaun, dre c'hras Doue priñs Breizh a-bezh hag un darn vras eus Bro-C'hall. » Adal ar c'houlz-se eo echu gant brezelioù-aloubiñ ar Vrezhoned, mistri en o bro ha war ar marc'had e Kornog Bro-C'hall.

(Da genderc'hel.)